

Le Converti de Notre-Dame

Dizro an dianket

KERIOLET

Pez kentelius en eun Arvest great e galleg

Gant an Aotrou J. Er BAYON

ha troët diwarnan e brezoneg Leon

Gant an Aotrou J.-M. PERROT



Ce sont les mystères dramatiques qui ont
peut-être fourni au peuple ses meilleures
distractions et sa plus sérieuse instruc-
tion.

Chanoine BULÉON

RENNES

IMPRIMERIE BREVETÉE FR. SIMON

—
Droits réservés

BB
871.
682
LEB



10738

55 D

891
682
LCS

DIZRO AN DIANKET

C'HOARIERIEN :

AN AOTROU KERIOLET.

AN AOTROU GARO.

AN TAD MIKEAL.

Koueriaded, bourc'hisien, peorien, gwerzerien gwersion, bugale.

An traou a dremen da zeiz pardon Intron Varia Druéz e Pluvigner 1634.

DIZRO AN DIANKET a zo bet c'hoariet evit ar wech kenta, gant Paotred Sant Noug, da Veurz Fask, 21 a viz Ebrel 1908.

Dizro An Dianket

LE CONVERTI DE NOTRE-DAME



I. — DIVIZ

AR BARDONERIEN, *er chapel*

Ni ho salud gant karantez ,
Rouanez ar zent hag an Elez ,
C'houi a zo benniget

O Pia !

Hag a c'hrasou karget

Ave Maria.

EUR GWERZER GWERSIOU, *var an teatr.*

Ar poñ kenta, kanet gant ar gwerzer e unan

En amzer goz hon Arvor
A oa tenval-maro,
Satan en doa e gador
E skeud ar gwez dero.
An Arvoriz a rene
Dre an denvalijen ,
Peb tra dezo ioa Doue
Nemed Doue hebken !

Daou graouadur dezan o tiskana outan.

Intron Varia Druez
 Patronez ar vro-man,
 Bezit hizio'n hon touez
 O selaou peb unan.
 Goulennit degant Jezuz
 A vezo hor barner
 Ma vezo trugarezuz
 D'ar Varn en hor c'henver.

O xri goude beza gwerzet eun nebeut ez eont kuit en eur gana.

EUR PAOURKEAZ (*gant flac' bou*)

Truez en han' Doue, ouz ar c'heaz mac' hagnet,
 Ne c'hell mui labourat, da c'hounid e voued.

EUN ALL

'r gwennegeg d'an hini a zo war e wele,
 Eiz vloaz' vo da c'houel Yan, ma ne c'hell ket bale.

UNAN DALL

Truez ouz ar c'heaz dall, en han Doue, tud vad.

EUR PAOUR ALL C'HOAZ

N'am euz ket mui, na breur, na c'hoar, na mam, na tad.

AN DEN DALL DA UNAN MADELEZUZ

Trugarez.

EUN ALL

Bennoz Doue.

AR GWERZER GWERZIOU

Prenit ar werz nevez.

Zo savet er bloaz-man en honor d'ar Werc'hez.

Intron Varia Druez
 Patronez ar vro-man,
 Bezit hizio'n hon touez
 O selaou peb unan.
 Goulennit digant Jezuz
 A vezo hor barner,
 Ma vezo trugarezuz
 D'ar Varn en hor c'henver.

EUR BOURC'HIZ

Pegement eo ganez ?

AR GWERZER GWERZIOU

Eun diner.

AR BOURC'HIZ

Del.

EUR PAOUR (*war eun ton truezuz*)

Eun dra

Bennak d'ar paour keaz koz da gaout eun tamm bara,
 Fenoz !

AN AOTROU GARO, *d'an Tad Mikeal*

Ah ! Tad Mikeal ! na pebez pardon kaër ;

Ar feiz n'eo ket eat c'hoaz euz bro ar brugeier ;
 Ar Werc'hez zo karet, ha pedet eo ivez
 Hag eur mor a Vreiziz a leun hizio he lez.

AN TAD MIKEAL

Hed an noz pad astenn, oan em c'hador govez

AN AOTROU GARO

Mall braz oa deoc'h neuze, lakât ho penn er mêt ;
 Skuiz e tlefec'h beza !

AN TAD MIKEAL

N'oun ket re !

AN AOTROU GARO

Pa vezer

En em gavet en oad ho peuz, eo mat teuler
 Evez ! mont goustatoc'h, diouall da dapout glaz
 O kemeret semmen n'int mui diouz an diskoaz.

AN TAD

Bah ! Doue' ro grasou d'an neb zo en ezomm,
 Da bep den diouz e stad e vez roët e zomm.

AN AOTROU GARO

Bet ho peuz ho lodenn ; arabad' velato
 Daoust d'ar pezh ho peuz bet, klask ober re ganto.

AN TAD, *o vont kuit*

N'ho pezet aoun ebed.

EUR PAOUR, *d'an Aotr. Garo*

En han Doue aotrou

Ho ped truez ouzin.

EUN ALL

Gwelit va goulou.

*An Aot. Garo a ro d'ar beorien eur gwenneig bennak
Bugale a deu da bokat da zaouarn an Tad Mikeal.*

AN TAD *a venneig anezo*

Ra vezoc'h benniget gant ar Werc'hez ho mamm

AR BEORIEN, *d'an Aotr. Garo*

Doué r'ho paeo mad.

EUN DEN DALL

Ma n'eo ket eun estlamm

Gwelet stad eun den paour hag a zo ganet dall;
Eun dra'roet dezan, a dal'vit ar bed all.

EUR BOURC'HIZ, *da eur paour*

Goude ar gousperou, diskabell, diarc'henn
C'houi raio evidon, teir gwech tro ar feuntenn.

AN TAD MIKEAL

Sellit'! pa zonzan! ha n'ho peuz ket klevet
Ar vrud a zo aman dre holl en em skignet
Eo ho paourkeaz kenveur e Parlamant Roazon
An Aotrou Keriolet,

AN AOTROU GARO

Va c'henderv e gwirion.

AN TAD

Flipet euz ar gouent, hag eo en em roët
Goasoc'h eged biskoaz d'an drouk ha d'ar pec'hed.

AN AOTROU GARO

Oh! n'oun ket souezet! Ar bleiz d'e neiz atao
En dra m'hellou bale, er c'hoat a zizroio.
Ar c'hellou ze zo kos, rak abaoue diziou
N'euz menek gant an oll nemed euz e droiou.

AN TAD MIKEAL

Ne ran nemed klevet! Ar c'heleier d'in me
Ne deuont ket war nij, rankout a reont bale.

ANT AOTROU GARO

M'em boa lavaret deoc'h n'eo ket gant dour merglet
E vez gelllet ober gwin, mad ha brao livet.

AN TAD

Petra rit euz Kana hag euz ar burzud bras
A reaz eno Jezuz, e gwin, dour pa droaz.

AN AOTROU GARO

An dour troët e gwin a oa sklear, hag hen-man
Zo strauillet kement e galon gant Satan
Ma n' he glanañ biken.

AN TAD

E zizro ouz Doue

A zeblante beza gwirion!

AN AOTROU GARO

A zeblante.

AN TAD

Anavezet am euz e vamm: eur zantez oa.

AN AOTROU GARO

Ah! ya!

AN TAD

He gwelet a ran c'hoaz — He rozera
Ganti, a veze dibunet gant evezted
He « Heuriou » en he dourn, war ar mean daoulinet
En he chapel, he gwelan, o pedi Doue
Da ober eur beleg euz he mabik.

AN AOTROU GARO

Hunvre !

AN TAD

Ya ! Hunvre, mar kirit, mez hunvre hag a ra
Kement mamm zo e Breiz.

EUR BOURC'HIZ, *d'eur gwerzer goulou.*

Del ! laka benniga

Ar piled-ze, ha kas anezan goudeze
War aoter ar Werc'hez !

AN TAD

E vidoc'h marteze ?

AR BOURC'HIZ

Nan, evit eur mab d'in, hag he deuz bet pareet
Eo e roan hizio, va frof ha va filed.

EUN TAD KOZ

Ha me va zad a deu, evit va merc'h vihan,
Eur verc'hik c'houezek vloaz, zo chomet he unan
Ganen euz a zilerc'h an holl vugaligou
A roaz Doue d'in. Epad ar gounidou
Er goanv tremen, eur pardaez, ec'h en em daolas
En he gwele, euz ar park dal ma tizroaz
« Tad koz, emezi, riou am euz, ha krena ran,
« Evel va mamm, pa c'hourvezaz, er gwele-man
« 'vit ar vech divezan ; m'euz aoun emañ tapet
« gant an dersienn. » — Ar paourkeaz merc'hik ! lavaret
He doa ar wirionez. — Tersienn a oa ganti ;
Drouklivetoc'h bemdez, he gwelet o teuzi
Tam ha tam ; ha netra ne c'helle diarbenn
Ar c'hlenved he c'hrigne. — Hi a oa dianken
O welet ar maro ouz he diskar er bez,
Hag a blege he fenn, d'ar falc'her didruez.
N'am boa ket va unan, fisianz ebed en holl
D'he gwelet o tizrei, pa deuaz en eun taol

Da zeiz kenta miz maë, eur wellaën warnezi
: He daoulagad tenval, 'n em lakeas da skedi
O para gant dousder, war skeuden ar Werc'hez
Bet digant va zud koz hag am boa great bemdez,
Epad nao deiz diouz renk, eur bedean dirazi.
: Pare oa va fôtrez, hag ar Werc'hez Vari
Her gouzout mad a ran, eo he deuz he fareet
Ha d'he zrugarekaat e teuan 'vel m'eo dleet.

(Mont a ra er chapel.

EUN DEN YAOUANK

Pa jomiz va unan, ha me yaouankik flamm,
Am euz he c'hemeret evit beza va mamm,
Hag abaoe bemdez, me an emzivad paour,
Am euz kavet bara, eurusted ha labour.

EUR MARTOLOD, *e vab, eul lestr gantan*

Hi eo he deuz miret ac'hanon diouz pense,
P'eo bet broustet er mor al lestr am dougenne ;
Ar re a ioa ganen, holl ez int bet beuzet
: Pedet am euz Mari, hag oun bet selaouet
: Mil meuleudi dezi.

AR BOBL

Meuleudi d'ar Werc'hez.

AN TAD MIKEAL

Mam an aotrou Doue, zo bras he madelez.
Piou a oar, marteze e teuo da zelaou
Ivez ar wreg santel, a bede gant daëlou
An Aotrou da ober, euz he mab, eur beleg ?

AN AOTROU GARO

Asa ! C'houi a gred c'hoaz, e tougo eun truilhek
Evel m'eo Keriulet, kalur an offerenn,
Kerkoulz 'vefe gwiska d'an diaoul eur zoudanen.

AN TAD MIKEAL

Bras eo galloud Mari, ha bras he zrugarez
Klevit nak eo pedet ha meulet heb paouez ;

Galloudus eo he c'homz, hag he c'halon tener
Ha den ebed biskoaz n'her pedas en aner.

(O kis an Aotrou Garo er Chapel).

Deomp en he lez, Aotrou, da bedi anezi
Zoken 'vit ar pec'her, dallet en e fazi.

AR BOBL ER CHAPEL

War an ton : Allas ne oufe den kompren.

Evit ma teurvez eo eun deiz,
Gant an Aotrou Krist Hor Zalver,
Diwar leton flour an hent kleiz
Lakât da zizrei ar pec'her.

War an daoulin, en ho tachen,
Mari, selaouit hor peden
Mari, selaouit hor peden.

AR BEOKIEN WAR AN TEATR

E vit ar paour a rank bemdez,
A zor da zor mont e unan,
A zo atao en dienez,
Betek ma teu e dremenvan.

War an daoulin, en ho tachen
Mari, selaouit hor peden
Mari, selaouit hor peden.

II. — DIVIZ

AR RE A IOA KENT, KERIOLET OUSPENN

KERIOLET *d'ar beorien.*

Hep ! la ! Potred, piou fell dezan gounid dek skoed
Kontet dezan dioc'htu.

(Holl gant spont, pe zouez).

An aotrou Keriolet.

KERIOLET

Ezom am euz eun den, e izili nerzuz
Da ziskar ar Christ -ze euz e wezen euzuz.

.....
Dek skoed n'eo ket awalc'h ! mad ugent a lakân

(Mont a reont kuit an cil goude egile).

N'oun ket evit gouzanv ar sellou anezan
: E kreiz va dizursiou, e krignont va c'halon
Ha kaër am euz tec'het ec'h heuilhont ac'hanon,
E kreiz an noz tenva, am c'hlaskont heb paouez,
Hag int evel broudou, am goulididruet
: N'oun ket 'vit padout ken !

Diskarit ar groaz-ze,
Hag he chichen distum, dieuboc'h e vô bale.
Oh ! n'am euz aoun ebed rak barn va zadou koz,
A zo o relegou er vered o repoz,
Na rak hoc'h hini c'houi !

AN AOTROU GARO

Digorit an nor dal
Ma teui 'r prosesion euz ar chapel raktal,
D'ober tro an dachenn.

KERIOLET

Abaoue peur eta
Eo deut ar c'hiz aman da vont da batera
Heb urz var va leve ?

Hep ! an douar a zo
Tro var dro d'ar chapel a zo d'in — It en dro !

AN AOTROU GARO

Oh ! oh ! kenderv, c'hoant klask trabas, ho peuz' m euz aoun
Hag evit ar wech man ho kavan direzon ;
Ar c'hiz a zo, meur a gant vloaz' zo, da dremen
Gant ar prosesion tro var dro da dachen
Ar chapel : Ho mam vad, morse ne enebas
Ha breman p'eo maro, choui deu da glask trabas
Ha tabut heb ezom.

KERIOLET

Komz mad a rit, aotrou
Mez kaër ho pezo komz, e chomo va gwirioù

Ganen — ha n'euz na giz, na lezen hag a virfe
Ouzin, pa girin, da gas diwar va leve
Ar batererien -ze.

AN AOTROU GARO

Hag e kredfec'h ober
Eun dra ken divalo?

KERIOLET

Hag e kredin, kenderv
Ya ! ha zoken ma kavan, unan bennak da zont
Da glask miret ouzin, e roïn trum e gont
Dezan : tri meutad en e gof, euz an dir-man
Hel kakaï da c'houzout, piou eo ar mestr aman

KERIOLET *o tenna e gleze*

Hep ! dizroït dioc'h tu gant ho prosesion
Pe m'ho lazo evel gedon, boued ar gon.

AN AOTROU GARO

Nan ! ar Werc'hez er mêt ! ha gweled e vezo
Piou araok egile da genta a dec'ho

KERIOLET *o welet ar Werc'hez douget e prosesion*

Oh ! ar Werc'hez !

AR BOBL

Turris eburnea, ora pro nobis !

AN AOTROU GARO

Hounnez n'he deuz kleze ebed.

KERIOLET

Oh ! nak ez oun me foll, hag ouz piou ez oun èt
Da glask trabaz !

AR BOBL

Auxilium christianorum, ora pro nobis.

KERIOLET

A zav !

AR BOBL

Refugium peccatorum, ora pro nobis.

KERIOLET

A zav it war ho kiz.

AN AOTROU GARO

It war araok.

KERIOLET *d'an aotrou Garo*

Truez, kenderv ! eur boan iskiz
Am goask ! n'eo ket outi eo e klasken gourin.

AN AOTROU GARO

Ah ! Kiza rit ! Hi ho taolo war ho taoulin,
Ma ne girit diouall.

KERIOLET (*gant eun ton pedus*)

A ZAV !

(*Ar prosesion a fonn a zav*)

Eur barr enkrez

Am laka da grena, evel deliou ar gwez ;
He sell a bar warnon, gant kement a zouder,
Ma teu war va diweüz ar bedennik zister,
Am euz lakeat bep noz da vont betek enni,
A dreuz fank va ene : me ho salud Mari.

Ave Maria.

AR BOBL

Ave, Maria !

KERIOLET *d'ar Werc'hez*

Perak sellet ouzin gant dousder evelse.
Ha ne welit hu ket falloni va ene !
Ya ene, eun dachen, he deuz va mam hadet
Enni, an had kaëra, ha n'int ket diouanet
Dre va faot ! eun dachen a dlïe rei frouez,
Euz ar gwella, ha n'euz enni, nemed strouez.
Oh ! war an dachenn-ze arabad deoc'h lezel
Ho sellou da bara, en aoun Gwerc'hez santel
Ne deufec'h, c'houi ker glan, da gizat gant an euz
Dirak va fallentez...

Oh aoun ha poan am euz,

Krena ran, gant ar spont, kredi ran e kouezan,
En eun islonk divent en e oueled an tan
Oh ! Gwerc'hez, an ifern, ez-vev deu d'am lonka
Oh ! emañ maro !

Nan ! c'houi am buezeka,
Hag ho tourn, a ziskouez an hent am euz da heul
Me ar pec'her fallakr evit tizout ar skeul,
A gas d'ar zantelez —

Oh ! pegoulz e vezo
Glan awalc'h va ene, da vont d'an nenv ho pro
Me hag a zo bet keit hoc'h heul hent ar pec'hed
Va ene a zo louz, saotret ha mil zaotret
Eun donjer e welet ; ha daoust da -ze Mari
C'houi deu d'en em ginnig d'am sikour d'her gwalc'hi
O Burzud !

AR BOBL

o burzud !

KERIOLET

Na c'houi zo mad, Intron,
Ha pegen c'houek, eo kaout diganeoc'h ar pardon
Mez perak diskouez d'in, kement a garantez ?

AR WERCHEZ, *eur vouez a deu a bell*

Dre m'az peuz lavaret, eun Ave d'in bemdez

AR BOBL

Ar gounid zo d'ar Werc'hez.

AR VUGALE

Meuleudi, meuleudi, meuleudi da Vari (2 wech)

KERIOLET

Deoc'h oun Gwerc'hez hiviziken
Deoc'h oun Mari, korf hag ene
Deoc'h e vezin da virviken,
Betek ar bez ha goudeze !

AN HOLL

Meuleudi, meuleudi, meuleudi da Vari
Meuleudi, meuleudi, meuleudi da Vari.

AR BOBL

Karantez ar Werc'hez Vari
A zo krenv, netra n'he zorro,
Krenfoc'h eget ar gasoni
Krenfoc'h eget falc'h ar maro !

KERIOLET

Meuleudi, meuleudi, meuleudi da Vari

(An holl a unan gant Keriolet.)

Meuleudi, meuleudi, meuleudi da Vari.

Sant-Nouga, 28 a viz Meurzh 1908.

J. M. PERROT.

